

# War glask gwezenn an teñzor



Gant ar gartenn-mañ e kavi pemp plantenn en tiez-gwer. E-harz pep hini anezho e kavi ur banellig, outi teir zresadenn ha tri niver. O lenn an destenn diwar-benn ar blantenn war ar gartenn e kavi pehini diwar an teir zresadenn a glot gant an destenn. Skriv an niver 'peus kavet tro-kein ar follenn-mañ. Pa vo echu da droiad, 'po ken samman an holl niveroù kavet ganez. Gant an hollad-se e kavi niverenn gwezenn an teñzor. Sell e pelec'h emañ war ar gartenn, ha skriv anv gwezenn an teñzor da welet ha gounezet 'peus.

Bez war soñj emañ en ul lec'h ma vez klasket gwareziñ plantennoù n'eus ket kalz anezho ken er bed. Setu 'ta un nebeud alioù:  
 Na zastumez netra (na delioù, na bleunioù)  
 Chom en alezioù  
 Arabat dit mont war ar reier.  
 Trugarez dit.

www.cbnbrest.fr



Ur blantenn debrerez-kig on. Tapout a ran amprevaned gant toulloù-trap gludek. Miliadoù a dakennoù bihan peg a zo war va delioù. Er grennamzer e veze graet « ros solis » eus ar plantennoù-se, da lavaret eo glizh ar heol. Faziañ a ra an amprevaned o krediñ eo an takennoù-se chugbleuñv, ha setu-int tapet brav ganin! Drosera 'zo e Frañs ivez, an Drosera rotundifolia da skouer, anezho spesadoù gwarezet n'eus ket konje da zastum. Sellet a c'hellez outo gant ar gwerennoù-kreskiñ 'zo en o c'hichen. »

E - Drosera binata  
 Aostralia

A - Hibiscadelphus giffardianus  
 Hawai'i

« Ne c'hellan ket gouennañ en natur ken, abaoe ma'z eo aet da get al labous a rae da va bleunioù bezañ pollenizet. Al labous-se, na veve nemet en inizi Hawaii, eveldonme, n'eus ket mui anezhañ abaoe ma'z eo en em gavet Mab-Den eno. Gant e bigos hir ha kamm e teue da evañ chug dous va bleunioù, ha peg e chome ar pollen ouzh e benn. O vont a vleunienn da vleunienn e kase al labous-se pollen gantañ betek o dared, ha setu frouezhusaet va bleunioù. Dont a rae ar re-mañ da vezañ frouezh leun a had. Hiriv-an-deiz, panevet un tamm sikour gant Mab-Den, ne vijen ket gouest da ouennañ va-unan, na da gaout had. »

B - Normania triphylla  
 Enez Madeira


C - Limonium dendroides  
 Enezennoù Kanari

D - Crinum mauritianum  
 Enez Maoris

Aet on diwar-wel en natur. Er geunioù e kresken, war vord ur stêr, en enez Vaoris. Pa oa bet savet ur stankell gant Mab-Den 'oa uhelaet live an dour, ha setu me beuzet. Evidon da vevañ en va endro natur a-nevez e rankje an dud aozañ un dachenn ma vijen gwarezet ha ma c'helljen bevañ brav. E penn kentañ an hañv e kresk bleunioù gwenn brav ouzhin, petalennoù hir outo.

Ur plantenn on, a-ouenn gant ar patatez hag an tomatez. N'eus ket mui ac'hanon en va bro-orin, Madeira. Daoust ma ne vez ket gellet debriñ ac'hanon, eo un dra vat mirout ac'hanon, rak kerkoulz all e vin talvoudus evit al labour-douar un dro bennak. Graet e c'hellje bezañ ganin, da grouiñ ur ouenn nevez hag a zalc'hje gwelloc'h ouzh ar c'hleñvedoù hag ar parazitoù. Da ginklañ a vijen brav ivez, rak bleunioù bihan kaer a gresk ouzhin, gellmouk anezho. »

Bez 'z eus ac'hanon ur wezenn na c'hell ket dont had outi diwar ur blantenn ken, da lavaret eo ne c'hellan ken dioueriñ ur wezenn all, a-seurt ganin, evit gouennañ. Koulskoude, o taoubenniñ va skourroù e teu a-benn al liorzhourien d'ober meur a skouerenn ac'hanon. Daoubenniñ ur skourr a zo pakañ anezhañ en ur sac'had douar, evit ma kreskje gwrizioù outañ. Pa vez deuet gwrizioù e vez troc'het ar skourr, dindan ar sac'had, ha setu deoc'h ur blantenn all. Ma klaskez mat e weli emaint o taoubenniñ ur skourr bennak din.







CH- *Limonium dendroides*



D- *Crinum mauritianum*



E- *Drosera binata*



B- *Normania triphylla*



A- *Hibiscadelphus giffardianus*



Tachennioù trovanel sec'h Inizi ar meurvorioù is-trovanel

Koadeter trovanel gleb

Menezioù trovanel gleb

Mont e-barzh

Evit kavout ar gwezenn teñzor :

Sammañ a ri an holl niveroù kavet ganez:

\_\_ + \_\_ + \_\_ + \_\_ + \_\_ = \_\_

Gant an niver-mañ ha da gartenn e kavi gwezenn an teñzor

Skriv amañ da heul anv gwezenn an teñzor:



CONSERVATION BOTANIQUE NATIONALE



Koñsevadur: Johanna Simeoni hag CBN Brest Departamant an deskadurezh- 06/2012 Troidigezh: Soaz Le Joncour www.cbnbrest.fr